

# Politikerezh yezh pe yezh politikel? Un heuliad tele en albaneg

Daoust d'he sevenadur dreist-ordinal e kevandir Europa, n'eo ket gwall anavezet Albania. Efed padus ur galloud komunour hollveliour hag en doa klozet ar vro warni hec'h-unan, ha da-heul, bloavezhioù a vrezel er broioù amezek ma vez forzhik a Albaniz o vevañ, zo penn-kaoz da gement-se sur-mat.



Istorioù ur strollad studierezed ha studeierien albanat a vez kontet en heuliad **O sa mirë**.

**n**'eo ket souezhus neuze ma n'eo ket brudet ar sevenadur albanat evit e binvidigezh war dachenn ar c'hleweled. Chomet eo paour ekonomiezh ar vro - unan eus ar re baourañ en Europa - hag hini ar broioù tro-war-dro ma vev Albaniz ivez. Hir ha pell e seblante bezañ an hent neuze evit sevel filmoù pe heuliadoù faltazi e yezh ar vro ha boas eo Albaniz da sellet ouzh heuliadoù tele a Durkia ouzhpenn-se. Gwallvrudet e oa an tele albanek e diavaez-bro zoken dre ma oa bet skignet d'ar seizh avel skeudennoù ur gazetennerez hag a ginnige keleier he bro... noazh-ran pe dost. Peadra da noazout d'ar c'heleier he doa da embann ha, gwashoc'h c'hoazh, da skeudenn he sevenadur.

Koulskoude, dibaoc ar bloavezh 2013 e ra berzh bras ur rummad tele sevenet en albaneg ha krouet e Kosovo. Ken dibaot ha dreistordinal eo ken e chom diaes-kenañ kaout titouroù diwar e benn ha ne hañval ket bezañ prest e broduerien da vrudañ anezhañ en tu all d'an dachenn albanek. Ouzhpenn 183 rann un hanter- eurvezh zo bet skignet betek-henn, unan

bep sizhun, rannet dre veur a rummad bloaziek. **O sa mirë** eo titl ar soap opera-se, da lavaret eo "*Pegen brav*"... Pegen brav eo bezañ Albanad, hervez al lugan anavezet gant an holl ahont.

### UR SOAP LIES-RANNYEZH

Luziet eo stad an albaneg ha luziet eo ar yezh implijet en **O sa mirë**. Estreget en Albania hag e Kosovo e vez komzet ar yezh-se hag en tu all d'ar broioù nesañ zoken, da lavaret eo en tu all da Vakedonia, Gres, Montenegro pe Serbia. Brudet eo an diaspora albanat ivez, pe vefe e Suis, er Stadoù-Unanet, e Turkia pe en Italia zoken rak ma'z eus un tri milion bennak a dud o chom en Albania nemetken, e vefe tamm-pe-damm kemend-all a dud gouest da gomz ar yezh-se e-maez ar vro.

Strewet evel ma 'z int, ha ken kemplezh eo bet istor o fobl, ez eo chomet rannet o yezh. Div rannyezh pennañ, an tosk (komzet e kreisteiz ar vro) hag ar gheg (en hanternoz neuze), zo bet komzet a-viskoazh koulz lavaret. Dre m'eo bet Albania klozet hag enklozet warni hec'h-

unan ivez, ha rannet diouzh Albaniz all e-pad pell amzer, ez eo brasaet c'hoazh an diforc'hioù yezh. Lod anezhe zo bet levezonet gant yezhoù slavek, gant ar gresianeg pe c'hoazh gant an italianeg. Meur a skritur zo bet implijet ivez evit ar rannyezhoù albanek ha diaes eo bet d'ar yezhourien en em glevet evit termenañ ur yezh standard. Er gevredigezh vremañ c'hoazh e chom diemglevioù bras war gement-se...

Sevel ur politikerezh yezh evit meur a vro war un dro zo diaes ha diaes-mat zoken. Er broioù balkanek ez eo diaesoc'h c'hoazh marteze... Se zo kaoz en doa bet ar sevener Ilir Bokshi ar soñj krouiñ an heuliad **O sa mirë**, ur rummad faltazi hag a gont buhez studierien deuet eus pevar-c'horn ar sevenadur albanek en ur skol-veur brevez a-vremañ. C'hoari a ra ar rummad gant o rannyezhoù, o diaesterioù evit en em gompren hag o divizoù fentus evel-just. Souezhusat tra : krouet e oa bet ar soap gant un ti-produiñ prevez, d'ar mare ma veze lidet kantvet bloavezh ganedigezh Albania !



Da-heul berzh ar soap evit ar re vras (er penn uhelañ), ur rummad heñvel zo bet produet, evit ar vugale en taol-mañ (rik a-us), **O sa mirë Kids**.

### UR SOAP LIES E BALIOÙ ?

Berzh en deus graet ar soap-se kerkent ha lañset. Meur a rummad zo bet produet a vloaz da vloaz ha lidet e oa bet n'eus ket pell zo ar 175<sup>vet</sup> abadenn. War Youtube e vez tizhet dindan berr amzer ur 500 000 selladenn bennak evit kement abadenn nevez a vez skignet, ha lod eus ar rannoù zo deuet a-benn da dizhout sifroù par da 1,5 milion a arvesterien zoken. Digredapl eo seurt sifroù pa soñjer en niver a albanegerien zo er bed-holl dre vras kement ha pa soñjer ne vez lakaet istitl ebet d'an abadennoù-se, pa vefe en albaneg "standart" pe en ur yezh vras "etrebroadel" bennak hag he dije sikouret da dizhout Albaniz an diaspora. Peadra zo da grediñ e vefe aze marteze an tu da ginnig abadennoù evit ar brasañ

niver er skinwel hep tremen dre ur yezh skouer, n'eus forzh pehini e vefe.

Tizhout seurt sifroù a ziskouez ez eo bet gouest an abadenn da vodañ a bep seurt tud, kozh ha yaouank dre un implij ledan a gomedianed pa vefent eus ar vro pe eus an diavaez, komedianed dianav pe "gwestoù" (tud vrudet), a bep seurt rannyezhoù gante. A-benn derc'hel lañs ha brud ar rummad-se e oa bet savet un abadenn nevez a-berzh an hevelep produerien e-doug ar bloavezh 2018. War ar memes patrom eo diazezet, evit ar vugale ar wech-mañ, gant ar ger **Kids** ouzhpennet d'an titl. Berzh a ra ivez hervez stadegoù ar rannoù kentañ !

Peadra zo da grediñ e c'hell un hent nevez bezañ digoret evit sevenadur hag

ekonomiezh Kosovo hag Albania. Priziet eo bet an heuliad gant skipailh al lec'hienn vicherel IMDb (Internet Movie Database), ul lec'hienn hag a renabl an holl broduerioù kleweled er bed-holl, evel unan tost d'ul live kleweled micherel etrebroadel ! Piv 'oar hag-eñ ne c'hell ket an diaspora bezañ un nerzh evit strewiñ O sa mirë er bed a-bezh ha bezañ e penn a-raok un industriezh sevenadurel zo o tiwan... Da c'hortoz e ro ar rummad-se un tañva fetis eus un doare oaled sevenadurel hag a vod an holl Albaniz. Un hent a beoc'h, efedusoc'h eget stourm politikel emsaverien albanat zo, gant o raktres "Albania veur" hag a lak kement a freuz e meur a vro ahont.